

Ya!

Ar gazetenn sizhuniek e brezhoneg

ARZ

Abraham
Cruzvillegas
gant Jil Daniel
p. 7

DANEVELL

Tud ar Bed -
Agni (3/3)
gant Gégé Gwenn
p. 8

Niv. 324 – 1,5 € an niverenn – Gwener 19 a viz Eost



Gouel ar Filmoù Douarnenez : Blaz Suafrika a vo tañvaet e bro ar Pennoù Sardin



■ Ton a vo roet d'ar filmoù adalek an dibenn-sizhun-mañ e Douarnenez. E-giz bep bloaz o do an arvesterien tro da c'houzout hiroc'h diwar-benn ur bobl, hec'h istor hag he sevenadur. Suafrika eo a vo lakaet war-wel en dro-mañ war blasenn an ti-kêr hag er salioù du. Filmaozourien, skrivagnerien, istorourien a vo bodet en-dro d'an deltenn vras evit eskemm gant an dud hag evit reiñ lañs d'an divizoù. Sonerezh a vo da glevout ivez, eus Afrika ar Su evel just hag eus Breizh ivez. Un digarez brav neuze da vont betek Douarnenez da dañva da sevenadur Suafrika a-drugarez d'ar sinema. (p.2)

Ar Yenished hag an Tinkers, pobloù kelt anezho ?

(p. 3)

Skol-veur hañv ar yezhoù bihan en Euskadi

(p. 3)

Gouel Kan ar Vartoloded : 140 000 a dud e Pempoull ar bloaz-mañ



(p. 5)

Arvorica-Breizh : E Brignogan eo bet c'hoariet arvest Strollad Ar Vro Bagan

(p. 5)

Un emgav gant Yann-Bêr Kere



Gant e vreur Guy en deus tapet brud evel kaner kan-ha-diskan. Ha kenderc'hel a ra, startijenn gantañ dalc'hmat. (p. 12)

Priz Sevenadur & Krouiñ Produet e Breizh

2011



Dizoleiñ, lenn, prizañ, selaou... abaoe 1998, dre an doare bruderezh-se e tegas Produet e Breizh un tamm harp, en ur lakaat war wel holl arvezioù ar c'hrouiñ, ken birvidik e Breizh, hag a sav brud ha labour diwar-nañ dre ar vro.